

Skriviñ istoerioù e brezhoneg get Kristian ar Braz



Meur a vlez en doa bevet Kristian ar Braz en estrenvro e-raok donet en-dro da Vreizh. Videour, animatour radio, troour, skrivagnour, div wezh eo aet getañ priz an danevell e brezhoneg da-geñver Gouel ar levrioù e Breizh (e 2012 evit *Rebetiko*, e 2018 evit *Feunteun Santez Diboan*). Daou zastumad danevelloù en deus embannet, *Rebetiko* e 2016 (Priz Xavier Langleiz 2016 ha Priz Pêr Jakez Helias 2017) ha *Kroashent-tro* e 2020 (Priz Sten Kidna 2021). Evit ar yaouankiz ivez e skriv Kristian ar Braz : *Spont*, *Pelec'h emañ an Tad Nedeleg*, *Park ar Boudiged* hag *Ar Gurunenn* zo bet embannet get an ti-embann Keit Vimp Bev, ha *Kest* oc'hpenn se evit ar lennerion en oad-krenn. Oberennoù klasel modern a dro ivez ag ar saozneg d'ar brezhoneg (Jack London, John Steinbeck, JD Salinger, Jack Kerouac...). Bremañ emañ é labourat evit embann un dibab ag e zanevelloù e galleg.

Get *Expression Livre* ec'h eus kinniget gober anvedigezh get labour Kristian ar Braz dre :

- Ur gejadenn get ur pennad-kaoz get Kristian ar Braz

Petra eo an traoù rekis evit krouiñ un istoer ? Get pep klasad e kaozeo Kristian ar Braz ag an dra-se. Evel-se o do tro ar skolidi da ober goulennoù doc'htañ a-zivout e vicher, ar skriviñ pe an troiñ istoerioù e brezhoneg. E-pad an amzer-se e c'hell ivez ar skolidi kaozeal a demoù evel ar lenn pe ar feson da skriviñ senario un istoer : penaos sevel ur sinopsiz diàr ur soñj, penaos rentiñ àr baper ar reuz a vez pa arru bec'h, degouezh pe trouz en istoer, penaos krouiñ tudennoù hag a c'heller krediñ enne hag em stagiñ doc'hte pe, er c'hontrol, tudennoù doñjerus / vil...

- Un atalier skriviñ er c'hlaz


Àr-lerc'h ar gejadenn, hag evit monet pelloc'h geti, e tay Kristian ar Braz d'ar c'hlasoù evit un atalier skriviñ istoerioù brezhonek. Gelllet a ray ar skolidi sevel istoerioù en ur heuliiñ an temoù implijet get ar skrivagnour : an anken e *Spont*, an enklask e *Pelec'h emañ an Tad Nedeleg*, ar c'hontadennoù a Vreizh e *Park ar Boudiged* hag ar c'hudennoù kevredigezhel a-vremañ er *Gurunenn*...

Ar c'hejadennoù hag an atalieroù a c'hell bout lakaet da gouchiñ doc'h raktres ar c'hlasad ha doc'h an temoù studiet e-pad ar blez.

DECLIC MÔMES

parcours Expression Livre

Kristian ar Braz
CM1/CM2



Ecrire des histoires en breton avec Kristian ar Braz



Kristian ar Braz a vécu plusieurs années à l'étranger avant de revenir en Bretagne. Vidéaste, animateur radio, traducteur, écrivain, il a remporté deux fois le prix de la nouvelle en langue bretonne du Festival du livre en Bretagne (2012 pour *Rebetiko*, 2018 pour *Feunteun Santez Diboan*). Il a publié deux recueils de nouvelles *Rebetiko* en 2016 (Prix Xavier de Langlais 2016 et Prix Pierre-Jakez Hélias 2017) et *Kroashent-tro* en 2020 (Prix Sten Kidna 2021). Kristian ar Braz écrit aussi pour la jeunesse : *Spont*, *Pelec'h emañ an Tad Nedeleg*, *Park ar Boudiged* et *Ar Gurunenn* ont été publiés aux éditions Keit Vimp Bev, ainsi que *Kest*, pour un public adolescent. Il traduit également des classiques modernes d'anglais en breton (Jack London, John Steinbeck, JD Salinger, Jack Kerouac...). Il travaille actuellement à l'édition d'une sélection de ses nouvelles en français.

Ce parcours Expression Livre propose de découvrir le travail de Kristian ar Braz à travers :

- Une rencontre avec un temps d'échange avec Kristian ar Braz


Quels sont les ingrédients pour créer une histoire ? Kristian ar Braz échangera avec chaque classe sur ce sujet. Ce sera l'occasion pour les élèves de lui poser ses questions sur son métier, l'écriture ou la traduction d'une histoire en breton. Ce temps favorisera l'échange avec les élèves sur des thématiques telles que la lecture ou la construction du scénario d'une histoire : comment établir un synopsis à partir d'une idée, comment créer une tension dramatique à partir d'un problème, événement ou conflit, comment construire des personnages crédibles et attachants ou au contraire repoussants/odieux...

- Un atelier écriture en classe

Dans la continuité du temps d'échange, Kristian ar Braz interviendra dans les classes pour un atelier d'écriture d'histoires en breton. Les élèves pourront inventer des histoires en suivant les thématiques utilisées par l'auteur : l'angoisse dans *Spont*, l'enquête dans *Pelec'h emañ an Tad Nedeleg*, le conte breton dans *Park ar Boudiged* et les problèmes sociétaux contemporains dans *Ar gurunenn*...


Les temps de rencontre et d'atelier sont adaptables au projet de la classe et aux thèmes étudiés pendant l'année.

Bibliographie




Ar gurunenn (2021)

Dispartiet eo tud Yannig abaoe nebeud amzer. Dont a ra e dad en-dro d'ar gêr da welet anezhañ... dres pa grog ar c'hraouiañ abalamour d'ar gurunenn ! Asambles e rankint holl chom. Evit pegeit ? Petra a c'hoarvezo ?



Park ar Boudiged (2019)

Piv n'anavez ket an Uhelgoad, gant e c'hoad hag e reier burzhodus ! Hag al lenn ken brav ! Met al lenn-se, tudoù, n'eo ket bet eno a-viskoazh. Setu pezh 'm eus desket an deiz all pa oan aet di gant va c'hlasad. Pebezh istor ! Deuit d'am heul m'ho `peus c'hoant gouzout hiroc'h !



Pelec'h emañ an Tad Nedeleg ? (2014)


Erru nozvezh Nedeleg. Un dra bennak a zo aet adreuz ar bloaz-mañ avat. Ret e vo da Vaela ha d'he c'hoar Lena diskoulmañ ar gudenn gant sikour o mignoned.



Spont (2008)


Petra a zo gwashoc'h evit ur plac'hig vihan eget bezañ hec'h-unan diouzh noz, e-kreiz Menezioù Are hag en em gavout tal-ouzh-tal gant un euzhvil ?

Bibliographie




Ar gurunenn (2021)

Quand le père de Yannig, récemment divorcé de la maman, revient pour une visite, toute la famille se retrouve bloquée ensemble à la maison à cause du confinement dû au Coronavirus. Combien de temps cela durera-t-il ? Qu'est-ce qui va se passer ?



Park ar Boudiged (2019)

La découverte d'Huelgoat, commune bretonne, de son bois, de ses roches enchantées et de son lac, lors d'une sortie scolaire.



Pelec'h emañ an Tad Nedeleg ? (2014)

C'est la nuit de Noël. Mais quelque chose ne va pas cette année. Avec l'aide de leurs amis, Maela et sa sœur Lena doivent absolument trouver une solution au problème.



Spont (2008)

Qu'est-ce qui peut être pire pour une petite fille que de se retrouver seule en pleine nuit, face à un monstre au milieu des Monts d'Arrée ?